

**Berthou.** (Alc'houeder Treger) Pleuvihan (1861) – Pleuvihan(1933)

**Frealzidigez da Gerzilin** (= Tiercelin). Bet embannet e 1912.

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Viou-koukoug ha faziou kemmaduriou a zo er skrid orin.

### **Frealzidigez da Gerzilin**

Greet ah-eus da zevez, O ! Loeiz Kerzilin !...  
War da gador varzeg, en da liorz a hloar,  
Aze bremañ, dindan bannou eun heol klouar ;  
Ha da benn en da zorn, da vreh war heh ilin,  
Lez da zellou da vond, seder, 'uz d'an douar :  
Greet ah-eus da zevez, O ! Loeiz Kerzilin !

En donder ar hoajou leh m'eo kuzet Marzin,  
'Mesk at gwial luziet, leh ne hall den diskenn,  
O klask ar Barz kelhiet, te 'gavas e Delenn ;  
Raktal Brekilien da glemm ha da hoarzin,  
An Delenn o krena gand kren sakr an Awen,  
En donder ar hoajou leh m'eo kuzet Marzin.

Dre hent al levenez, an treh hag al lore,  
Te a zo tremenet en eur yaouankiz hir.  
Ar herden aour, ar re arhant hag ar re zir,  
Unanet war da delenn gaer, e peb mare,  
A ganas Breiz-Izel, ar Vreiziz hag or gwir,  
Dre hent al levenez, an treh hag al lore.

Med 'n eun hent a dristidigez hag a gañvou  
'Errue penn an hent a heuillez diagent.  
Deh laouenedigez... O ! kalonad kerkent !  
O ! skeud an ivin du war dremm glaz an neñvou !  
O ! morad a zaelou, en gourlano divent !...  
Hent a dristidigez varvel hag a gañvou !

Petra 'fell dit ? Setu aze red ar vuhez !  
A beb darvoud eo red tenna peb daioni<sup>1</sup>.  
Evid arnod ha barn, amañ 'tremenom-ni,  
Ar blanedenn n'eo na tener ni didruez :  
Evel m'ema, glahar ha joa mesket enni.  
Petra 'felle dit ! Setu aze red ar vuhez !

Pez a dle beza a vezo, eme Wiklan.  
Beva a zo gouzañv. Bremañ te 'h-eus bevet.  
Da galvariou 'ra diouzit eun den galvet,  
Rag ar spered galvet a gresk e-kreiz ar boan.  
'Uz d'ar reuziou marvel dalh da spered savet.  
Pez a dle beza a vezo, eme Wiklan.  
Enor dit, Telennour - Meulom Doue, on Tad !-

---

<sup>1</sup> daioni : pep tra a hell beza mad.

Hag enor hag eñvor d'an Erminig varo  
Son da Delenn zantel 'zo bet klevet er vro.  
Marzin, euz e gousk hir, a zihun 'barz ar hoad,  
Hag e Êrouant Ruz a zo distro, fero.  
E peb degouez, meulom an Tad !